

- 95 -

Dastumad Pennwern : dornskrid 90

## 120. AR PLAC'H LIBERTIN

(follennoù 90-93)

Me o suppli, speret santel,  
 da reiñ dam speret al lumier  
 eun exempl a zo pitoyabl  
 ag or pen° e zeo profitabl            °or pen, kompren :  
 D'ar Vretonet a peb etat            oc'hpen, ouzpenn  
 Koz a iaouank a beb oad  
 Eb kaout desin da chokin den  
 Me a koms deus ar chervicherien  
 especial ar chervicherezet  
 Kalz anezo a zo dibarfet

Me a koms deoc'h deus eur chervicherez  
 a zo bed pel bras en eun tiegez  
 nemet goal vuez ne re de mestrez  
 er pares euz a ermini  
 e mestrez a kelen a nezi  
 na ne ra ken ar vizerablez  
 nemet ober goab deus e mestrez.  
 a goude flattal de vriet  
 e klasq na vije maltraitet.

e mestrez eun devez ne nem resolvet  
 gant aont na vije Doue outi fachet

Dezi eun devez en deus lavaret :  
 - va merc'h, ta vuzur a zo karget.

Var ben pemp goëch pebez eston :  
 - divoël oc'h ta punition

A ne re ken ar vizerablez  
 nemet c'hoarzin e klevet e mestrez

a goude se flattal de vriet  
 e klasq ma vije maltraitet.

e mestrez c'hoas e nem resolvet  
 gant aon na vije Doue outi fachet  
 Dezi eun deiz en deus lavaret :  
 - Va merc'h ta vuzur a zo karget

- 96 -

Pemp krouñdur a c'heus ganet  
ag a c'heus bed deus va vriet  
a dre mo ganez en o lazez  
en eun toul ar jardin o flantez.

Kommañ a eure ar vizerablez  
Da voëlla e kleved e vestrez.

- Ne ouffen james beza pardonnet  
Ken bras eo va c'hrim a va pelhet.

ebars ar bares deus a hermini  
e mestrez a kelen a nezi

Dond a eure da antren en retret  
Da ansao e c'hrimou ag e fec'het.

A nikun deus ar veleñen  
na rojent dezi an absolven  
Mes a la fin eur belek iaouank  
(/Mes/ goude en devoa kals nec'hamant)  
a promettas dezi an absolven  
ia mar graje ar pinijen.

Neuze a hordren dizi da hober  
meurbet e voa rust a kruel -  
mont seïz nozvez var benou e daoulin  
eb sortial demeus ar jardrin  
mont seïz nozvez da pedi Doue  
memeus var bez e bugale

A me a ranko beza ive  
evid reñ badichen dar vugale,  
d'ho lemel deus a kaptivite.

Dond a eure da entren er jardrin  
mez an nozvez kenta en devoa fin.

he bugale zo bed apparisset  
ag o deus hi bed dispennet.

- or mam kris or mam miserrabl  
or mam dinatur ag ingrat  
c'houi zo kauz deomp da veza privet  
Da vellet Jesus er joañstet.

deud eb badichen dor laza  
deud eo poent da perissa

- 97 -

komans a rejont de dispen  
 e goad a chervijas souden  
 da rei badichen de vugale  
 d'ho lemel deus a kaptivite

Antronoz ar beleg iaouank  
 en dewoe kals a nehamant,  
 ar velefen all en devoa en skandallet  
 Pinijen re rust en devoa roët

Ma zaz da offerena evid-hi  
 e happarissas der c'honsoli

Pa voa en e gonzekrasion  
 en devoa revelation  
 form eur goulm ven a remerkas  
 var an oter dirag e fass

echu eo gantan e hofferen  
 neuze e finissas e hanken  
 neuze e happarissas dezan  
 e trugarekas a nezan !

- Ar pinijen o poa din roët  
 a zo kauz ma on gant Jesus pardonnet  
 a dre verit o hofferen  
 me ia breman d'ar c'hloar eternal  
 c'hui a deuo ive eb talle  
 Bevid atao en doujans Dcue,  
 a ni a pedo on c'hoec'h assemblez  
 evid ma teuot d'ar rouantelez.

~~~~~

Mari Bizien, kemenerez en Taole, 29 févr. 1851

~~~~~